

Mes gouzout eo ra ambission zo bras.  
Hennes so eur pec'het ha ne guifait quet c'hoas,  
E touez ar gueren meneus a re dosta,  
A ve an ambission a vechou ar goaasan.

Ar zon ma zo zavel, carlen a zo guir.  
Ha zavel d'eun den yaouanc na puet kaout e zezir,  
Abalamour dan dud gant ho ambission  
So o ampic'h anesan nac ebars er c'hanton.

Marteze lod a c'hoarzo voar sujet ar son neverz  
C'hoarzin ar bez a gaont, na rin quez a boan dime,  
Lod a ve e c'hoarzin na voan o sotani,  
A bel al oc'h ober goab anezo o mon in.

Ma clevete ar Roue, quallou eus ar plac'h-se  
A zeufe da Vriez gantant eur messager,  
Da prononç aa c'hellou, enep d'ar plac'h yaouane.  
Evit ma disabuso, quemen an deus dei c'hoant.

Adieu melezour caér, adieu tremen amzer.  
Mont a ran d'a Guengamp, en desert a gaer.

Mammalas d'ar goal deot, vern quez piou a zisput  
Ma c'halonie a ran ar goal deot a ra vo mud.

Ma teldec'h gout a gleved gant piou eo a son ma gret,  
Ganteur paysan yaouane eus ar baras Brie,  
Ganteur paysan yaouane eus a draou ar bares,  
Hennes en deus he sovet, goudé coant eur noves

Mes ma so unan benag bars e compagnones,  
Hag en dese desir da c'houit piou so hennes :  
Eo eur paysan yaouane, eus a draou ar grisequer,  
Ma fel d'ec'h gued piou eo c'hui chalvo an eo Per

Asso compagnunnez, iscus a c'houennan  
Ma n'em deo quez gret ervay ar chanson-man,  
Me so eug den yaouane ne mes quez ar speret,  
Difaiet a c'hanou ec'h ma zou fait.

Clevet a red breman cetu a pen ar fin,  
C'hou a lezo anet me ne ouzoc'h quez quez,  
A nep a gavo dean, n'en de puet doneat  
A gomposo eun oll hag a vo agreeabl.

## KANAOUEN AN DUZUNEL

Cals amzer a meus kollet  
O furchal a c'hoajou,  
« Vit surpren eun durzunel  
Kousquet var a brankou  
Vervel a meus us allies,  
Ko tannef a meus «!!!»  
Achapet an durzunel  
Ha nijet er c'hoat all, (bis.)  
Dious an noz hag ar mintin,  
O klevet lapousset  
O kana, e fredonin,  
D a vek ar gwez pignet,  
Na neus nikun anezo  
Hag a bik ma c'halon.  
Evel monez eun durzunel  
O welan d'he mignon,  
Hirvoudin a ra noz d e  
Gant ar boan ar glac'h  
Evel e2n intavez paour  
Kollet ganti a far,  
Ma neus nihun anezo  
Hag a bik ma c'halon,  
Evel moez eun durzunel  
O welan d'he mignon.  
Petra durzunel youank,  
A dourmant d'ha c'halon ?  
\* Kollet a meus, emezi.  
Ma lidellan mignon.

Ma ne zo chesseour  
Da ober din merveil  
Me varvo gant a glac'h  
Da va mignon fidel  
« Neus na zoulent, na remet  
Ner consolation  
Kapabl da sont da galmin  
Tourmancho ma c'halon  
Trec'het oon gant ar glac'h  
Mont a ran da vervel  
Mez na varvin ket kontant  
Ma na varvan fidel  
Geulet a meus o vervel  
An durzunel yaouank  
Dizec het ma c'halon,  
Gant ar boan nan tourmant,  
En hec e'huanan diviza  
En deuz c'hoas repetet  
« Ha ma mignon fidel  
Ractal eo tremenet  
Melezour scler ha brillant  
Demeus a fideliter  
Ar model ar sinceran  
Demeus ar garante,  
Nan, na vervin ket kontant  
Ma na vervañ fidel,  
Birviken na sizonjin  
Maro an durzunel

Bouet Z. von Loeck